

17 41.

CANTIC

VAR SUJET AN DANGER DA BEHINI

E BET EXPOZET AN

AUTROU'N ESCOP A GUEMPER HA LEON

EN EUR VONT

da rei ar Gonfirmacion d'an Enez-Sun,

an 13 a viz Even 1863.

Var an ton : *Pautret Plouillau.*

Tostaït oll, canomp ar c'hloar,
Meulomp an Tad Eternel,
Da veza distroet clac'har
Euz an tad hon ebestel,
Pini nevez e Beg-ar-Raz,
Var point da veza beuzet,
Zo bet saveteet dre e graçz,
Lec'h cant mil int bet collet!

An Autrou'n Escop, var mour bras,
An drizec a viz even,
Eus a Goyen a bartias;
Var ar Sloup *Roc'h-Jacquelen*;

Da gommanç ar mour a voa sclær,
Douçz, pur, evel an evou;
An dud oll grede an amzer
A vize nep tourmanchou.

An Escop Kemper ha Leon,
D'an Enes-Sun e zae
Da rei ar Gonfirmacion
D'ar c'hristenien ar bro-ze :
Diou pe teir heur, d'ar muia,
Da vont a voa necesser ;
Mæs an urz ar Mæstr huella
Changeas tout en e c'henver.

Neubout varlerc'h, avel a ben
Eus cournaouéc a savas ;
Ar sloup loveas, ten var ten,
Hag ar brumen a zeuas
Da gresqui ouspen an danger
Er plaçou quer pirilhus ;
Evit Beleïen eus ar guær
Ar stad a voa goal nec'hus!

An tud a vour oant eus ar vro,
Hag, a enep an dra-ze,
Na ouïen quiet pe tu distro,
D'ho ziouall eus ar pace :
Ar brumen quen stanc oa tenvel,
Hag an heaul goulscoude
Euz an heur e gousq a voa pell,
Ha goassoc'h a guement-ze!

Distrei, da vont var o c'hiz
Na voa quet tam bet æssoc'h ;
Rag an Eff oa goloet piz,
Hag ar mour oa izelloc'h ;
Da vont adare barz ar porz,
A pelec'h oant diblacet ;
Hag a oant dija treuz Penhors,
Chapel dian Plozevet !

Coulscoude an Enezourien
Eus creis caloun a grene
Gant aoun, var bouez ar brumen,
Eun droug benag arrufe.
D'an Escop quen leun a galon
Da zont express dan Enez
D'a creffât ar religion,
Dan disprij eus e buez !

Eun equipach, eus ar vella,
Diouc'h-tu en em guinigas,
Da vont ho clasq ; enep a voa
D'ho c'haout calz ambaras ;
Mæs fianç crogas er patron,
O fedi, en eur songeal
D'ar Verc'hez ha da sant Anton,
Hag ordrenas partial !

Hirio, Sant Anton, emeza,
Mignon d'ar martolodet ;
Hag eisvet sacramant var choa,
Esperanc a eurusdet ;

Saint Anton

Eus an Eff ar Stereden Vour
Bremaïc hor c'hunduo ;
Hag a zeuio en hor sicour ,
D'ho tiouall eus ar maro !

Nao den , er vag en em strincas
Ha redas d'an tu Guevrett ;
Ha diou heur var lec'h a glevas
Ar c'hloch ar sloup faziet ;
« Ra vezo beniguet Jesus !
Evit c'hoas n'int quet collet , »
A grias ar patron joyus
Ha steras eon d'an andret.

Er sloup , a amzer da amzer,
Fusuilhou voant discarguet ;
An tud ar vag , o cleout sclær,
Hopas quenta ma glever ,
Bars fin , an eil eus eguille
Tostas gant ar blijadur
Eun inez mantret eus an Ee,
Eun Tad eus he crouadur !

Er bourz ar sloup a voa nav heur
Er mare ar vag arruas ;
Ar pilot lavaras : breudeur,
Brema oun diambaras ;
Livirit d'in pegueit omp
Eus an aber an Enez ?
Divedic eo , buan querzomp
Evit hor compagnunez !

Handwritten signature

Na ellomp quet beza digouet,
A respontaz ar patron,
A bars pemp heur, rag oc'h pelleet,
Gant eur c'hourant disordon;
An avel goulscoude so cre,
Hag en eun toul mad croguet;
Mæs na vellan quet sclær an E,
Hag ar guerrec so cuzet!

Eus an tud ar vag, eul loden,
Er bourz ar sloup a chomas,
D'he c'harga gant lian a grenn,
Hag ar re all a stagas
Ar vag a drein; unan hep quin
D'ar varren en em laquas
Mæs ar re all tout dichagrin
Da fumi a gommanças.

Evel eun dolphin a droc'he
Ar sloup an touennadou;
Rag eiz pe nao scoulm a file,
Creis quement a zangerou;
Mæs, petra fell deoc'h? Na miser,
Pirilh, na devaligen,
Na zistro quet eus ho tever
Bretonnet, guir christenien!

Allas! divar dro anter-nos,
Eur martolod a grias:
Querrec araug! Bezit dispos!....
Ha sin ar Groas a reas.

Ni zo tout collet, emeza,
Graç evidomp-ni, Jesus,
Arru e hon heur diveza ;
Guerc'hes pur, but truezus !

Ar patron, quenta ma glevas
Ar martolod o c'hrial,
Gant eun toll coutel a droc'has
An toulin en eur songeal
Scanvoc'h a ze var c'hein ar mour
Ar sloup an nije pignet ;
Hag essoc'h en izela dour,
En tu all nige passet !

Eun huel touennad a zeuas
En eun instant d'ho quemer ;
Liger ar vag, a basseas
Evel d'ar post eul lizer :
Mæs ar sloup a voa pouneroc'h,
E creis caër a zroas :
Ha neubeut muioc'h, var ar roc'h
A vize chomet, allas !

Ar pilot, eürusamant,
A voa den eus e vicher,
Losquas ar varren ; ar c'hourant
Dougas mad en ho c'henver :
D'ar fin e zro, ar sloup redas
Adare var eun touennad,
Hag hep droug a guntunuas,
Glorius eus e barad !

E creis an trubuilh eus an dud ,
An Autrou'n Escop chromas
Leun a fianç, mæs calm ha mud ,
Er point-ze a tisquezas
Penaus eur c'hristen dle beza
Pa za da vel he Varnour,
Prest da respont, evel brema
Eur soudard d'an adversour!

Saveteet omp, graç da Zoue!
Emeza ar vartolodet;
Tost bras edoump bet d'ar pace,
Guerc'hez! Ra vezoud meulet!
Pebez blijadur da tostât
D'hor c'herent muia caret,
Ha brema souden d'ho foquât,
Pa zint quer bras glac'haret,

E guir diaraug beg an de,
Ar sloup bian arruas,
Diou heur var lerc'h, ha goulscoude,
Var bord ar mour a c'havas.
Quement hini voa en enez:
Coz, yaouanc, goâzet, merc'het
O c'houlenn digant ar Verc'hez
Ra na vijen quet beuzet!

Assamblez tout en em strincas,
Gant eur guir devotion,
Var taoulin, hag a c'houlennas
He sant benediction

Digant an Escop souezet
O cuellet en he c'hortos
An enezourien dastumet
Quen dihun, ha quen dispos!

Inutil eo da lavar
Pebez gonsolation,
Pebez joa pur, ha pebez gloar
Eus ar Gonfirmacion
A dennas an enezourien
Hag o cleout purvuie
Dirag na pirilh; nag anquen;
Ho sant Escop na grene!

Da vont er plac quer perilhus
Scriva 6 meuz sonch ober
Da c'haout eur vag mouguidus
Digant an Impalaër;
Evel-se biquen seurt clac'har
Coezo var an Escopti;
Evel-se vrasaïo he c'hloar
Ha gresco he veuleudi!

AUGUSTE L'ALLOUR,
Mæstr Scholaer, ru Mescloaguen,
n° 15, e Guemper.

(PROPRIÉTÉ DE L'AUTEUR).

E Guemper, moulet gant AR. DE K'ANGAL.